

AR ROUE GRALON A KÆR IS

649A_c

« A ba-ouë m'eo heuzet kær Is
« Neus ket evel par da Bâris. »

En Escopti Kerne, e lec'h ema brema môr Douarnenez, e voa guechal eur guær vras meurbet, hanvet Is.

Eur voguer ledan ac huel, gant sclujou houarn he difenne deus ar môr. Er gæur-ze ne velet, e touez an dud pinvidic nemet dizurs, goall exempl a fallagriez. Gralon, pehini a chome neuze en Is, a voa Roue Breiz-Izel, Bet e voa brezeller en e iaouanquis, a rust en andret e zujidi ; mæs en he gosni, sclerijennet dre er feiz christen, e teuas da vezan douc, evel eun oan. Hirvoudi a re aliez var dizursou Is, a var a vuez dirollet a rene e verc'h ar brinces Athès gant an nob'ans iaouanq a guær, a deus ar vro hanvet, hirio, Kær-Ahès, pehini a voa dezi a leve.

En amzer-ze, ive, e oa en Breiz-Izel, daou abostol zantel, daou vignon da Zone, Sant-Caourentin, kenta Eskop a Guemper, a Sant-Guenole (1), kenta abad a Landevennec ; aliez ho devoa prezeguet ar feiz er guær a Is, a gourdrouzet ar Roue Gralon, abalamour d'an droug-obero, d'an torfejou a d'an injustiçou a ret, bemdez, e pales e verc'h iaouanq : mes goab a ret anezo, ac ar Roue, semplet dre an oad, nen devoa mui a c'halloud avoalc'h evit arreti dizorzou ker bras.

Doue a skuizas, er fin, o velet Is caledet en e fec'hejou, ac a roas da anaout da Ael Breiz-Izel, e vignon Guenole, penos, kent, Guenole a bignas voar c'halon. Mæs tremenet e voa an amzer a druez. Pa en em gavas an abad sanel, var dro anter-noz, sclujou Is a voa digor, ac ar môr a c'hrose spountus, o tiruillal var an dud, an tier ac ar palechou. Guenole ne allas savetei nemet Gralon eb ken, deus a behini e veler c'hoas roudou treid ar marc'h e roc'h Garrek.

Ahès, merc'h fall ar Roue, kiriek a revin Is, a voë troet e *Mari-Morgan*, anter maouez ac anter pesk. Pa bar al loar, he c'hlever c'hoas aliez o cana, var môr Douarnenez, a uz revinou ar guær veuzet. He daoulagad a zo evel diou stereden, he bleo evel an aour, he gouzoug ac he diou vrôn ken guen ac an erc'h, ac e mouez melodius a laka da gouskat dœ e chalmou evelze, martolodet ar vro, ractal m'he c'hlevont, a lavar entrezo gant spouron : « Tec'homp. Ahès a zo savet deus he phalès, » ar guall amzer na ma ket peil, a ma taleomp, e vezimp tolet, » kousket var ar rehyer.

Kær Is ne ma mui evel Sodôme, Gômor a Babilon ; ac hirio ar mor a ruill dreist he fen.

Da zao-eol, Gralon, o veza pignet, gant Guenole, var leïn Mene-Hom, a dolas, ac'hane, eur zell truezus var e lerc'h : Mæs ellec'h ma edo ar guær gær Is, ne velas mui nemet môr

(1) *Guen-oll-e, Oll-e-Guen* (il est tout blanc) hanvet evel-ze gant e vam, ar Santez Ven, abalamour ma ca eur buguel koant a far, Sant Guenole, dre e vertuziou, en deus meritet an hano caër a Ael Breiz-Izel (l'Ange de la Bretagne).

Douarnenez, ac e kouezas d'an daoulin evit trugarecat Doue ac ar Verc'hes da veza saveteet e vuez.

Pa savas divar e zaoulin, e velas dindan an heol, o luguerni, *Ru-men-golou*, pe *Men-ru-ar-Golou*, var pehini e vije sacrificiet, tud veo, a beb mis, eur buguel bian c'hoas eus ar vrôn. Neuse, beuzet en he zaëlou, ac e zaou lagad savet e trezeck an En, e lavaras d'he vignon santel :

« Var ar men ru zont, consacret da eun Doue barbar, me a
« rañ sevel eun ilis caër d'ar Verc'hes, ac el leac'h ma skuiller
« ar goad da Teutatès, e skuillo Mam ar guir Doue he graçou
« var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad de bromessa, a beleyen ar Bayanet, o veza en em revoltet, pa veljont dispen templ an Doue faos Teutatès, ar Roue christen ho zrehas e kever Argel, e pen ar Vretonnet convertisset.

Goude beza gret e beden, var Mene-Hom, ar Roue Gralon a heuillas Guenole da abaty Landevennec, savet gantan, eun neubout blaveziou kentoc'h. Diarog kement ze, en devoa c'hoas roet e balès, en Kemper, da Sant Caourentin, pehini en devoa toret e naon dezan a de compagnunez gant eun tam deus he besk bian. E plaç ar palès-ze, e ma brema ilis caër cathedral Kemper.

Gralon a dremenas, e Landevennec, ar rest eus e vuez, en eur binijent gallet, ac alies e ze gant e vignon ker da Remengol, da pedi evit e hobl, an *Itron-Varia-Remed-Oll*. Beza en devoa an eur d'he gullet brudet bars en pevar c'horn Breiz-Izel, ac o vervel etre divrec'h, Sant Guenole e Landevennec, e recomande e ene da Zoue, en eur lavaret gant ficians :


Itron Varia Remengol, »
« Douezet kant viôas a zo, a baoue, ma e maro Gralon, ac
ar Vretonnet, pere zo, bepred, tud a feiz ac a galon, ho deus
c'hoas sonj eus ho roue coz, ac eus e vignon Sant Guenole.
Mæs ma c'hanevesen guelloc'h histor ho bro gaër, pazeont da
zul an Drindet, da bardon bras Remengol, a pa velon môr
Douarnenez, Mene-Hôm, Landevennec, tour-huel ilis miraculus
an *Itron-Varia-Remed-Oll*, e lavarfont an daëtou, en ho daoula-
gad, en eur vale gant respet, var douar ar Sænt ac ar Rouane :

« Bras ar burzudou a zo bet,
« Ebars an amzer dremenet !... »

Bras ive ar burzudou a ra c'hoas, hirio, an Itron Varia Remengol, en andret an oll Vretonnet, ac ispicial en andret ar Pelerinet a deu, bemde, d'he gullet, alies eus a bell bro, a calç anezo diarc'hen ac e corf ho rochedou.


Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour ar beorien noas, sourdardet Breiz-Izel, e creis tan ar brezel, ar vartholoded var ar môr bras e furo, an oll dud affliget a gorff, a galon ac a speret, darn en ho foanniou, darn e dangeriou, darn all en dizesper, a darn, ive, var gouela ar maro, ho deus sonj eus ho mam douç a mad, ac alies e leveron dezi, gant carante a gant ficianç en he galloud, ac en he madelez.

« Itron Varia Remengol, patronez Breiz-Izel,
« Pedit evidomp, hirio a pa rankimp mervel ;
« Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet,
« Ho deus ho caret, ho car, ac ho caro bepet. »



GUERS

AR ROUE GRALON A KÆR IS



Var ton : *Judic ac Holofernèz* ; pe var ton : *Bocen Elliant*

1.

Petra 'zo 'neve e ker Is,
M'ar de ken drant ar iaouankis,
A m'ar clevan ar biniou,
Ar bombard ac an telennou ?

N'eus e kær Is netra neve;
Rac ar festou-ma 've bemde,
N'eus e kær Is nemet traou coz,
Rac ar festou-ma 've bemnoz.

Bojennou dreis zo divoanet
E zor an ilizou serret
A, var ar beorien e voëla,
E losker ar chaçz d'ho drailla.

N'ho c'hoazek
A, da ober he gurunen,
E roont ho c'hæra rosen.

Ahès, merc'h ar Roue Gralon,
Tan an ifer en he c'halon,
Er pen kenta deus an diroll,
A drein d'he c'heul ar gær da goll.

Sant Guenole, gant kalonad,
So bet m'eur vech e kâout he zad,
A, gant daëlou, an den Doue :
En eus lavaret d'ar Roue :

« Gralon, Gralon, laka eves,
« D'an dizurzou a rên Ahès :
« Rac tremenet vo an amzer
« Pa skuillo Doue e goler.

« El lec'h m'a voa c'hoarzadek kent,
« E vo neuze scrignadek dent,
« El lec'h ma voa kanoennou,
« El vo neuze scrijadennou !... »

Ac ar roue fur, spouronet,
E verc'h en deus bet kelennet :
Mæs diskaret dre ar gosni,
N'eus mui a ners da stourm outi.

A, skois gant rebechou he zad,
Evit m'ont d'eus he zaoulagad,
Hi' deus gret, gant droug sperejou,
Eur palès caër lost d'ar sclujou.

Eno, gant he amourouchen,
E ma fenos an abaden,
Eno, en aour æc er perles,
Evel an heol, e par Ahès...

II

« Plijadur dec'h er palès-man,
« Merc'hed chentil a potret skân,
« Plijadur dec'h a nosvez grën,
Eme eur Prinç en eur antren,

Ar Prinç a zougue dillat ru,
E varo e voa hir a du,
He oll izili a verve,
Ac e zaoulagad a zeve.

Ra viot deut mad estranjour,
Eme Ahès gant eur bek flour,
Ia, ra viot deut ar guella,
M'ar c'hanveit an traou falla.

Neuze em bo digomer mad,
A respontas an divroad :
Rac me er fall zo ken disket
Ac an ini n'ens e c'hrouet.

Da ober eun dro zancz ganti,
Ac an oll, a eneb Doue,
Goassan ma c'hallent a done.

Pa voa d'an abaden-ze fin,
Danser Ahès, en eur c'hoarzin,
Ac en eur zével he ziou skoa,
A lavaras : « n'ouzoc'h netra !...

Kerc'hit din-me deus a gær Is
Verseillou santel an llis,
Kerc'hit croas ha crucifiet
Eun hosti sacr, ac e velfet !...

Ahès a respontas timad :
Cavet, vint e chapel va zad,
Rac va zad diot c'hoaz a gred
En trompler ze a Nazareth !...

Tri a redas e ber amzer,
Ac a ziskaras an Auter,
Ac an traon sacr a voe douguet
Entre daouarn du ar pec'het.

Ar Prinç ru, ractal m'ho guelas,
Agreis e galon a c'hoarzas,
Ac a lavaras c'hoas ennan :
« Plijadur dec'h er palès-man !...

Da guenta, a doliou botou,
E vrujunas ar vesseillou,
Goude flastras ar grucifi,
Ac e krenchas var an hosti !...

A varne, gant an oll e noas,
En eur gana : « Mallos d'ar groas !!!... »
E ras, e seis stum dishenvel,
Dansou ar seis pec'het mervel.

Kerkent ar palès a grenas,
Ac ar c'hurunou a strakas,
Ac, a dreus ho zellou nec'het,
E skoàs tân glas al luc'hed.

« N'a c'houi vel, eme ar Prinç ru :
« Me laka Doue var e du !... »
Ac e lavarent gant glac'har :
Ahès he deus kavet he far !...

III

Pa voa fin dar sacrilejou,
Messenger an droug sperejou,
Chomet e eunan er palès,
A dostaas da gâout Ahès :

« Va douçik koant, merc'h da Gralon,
« A muia karet va c'halon,
« A nâfen me ket eneb guis
« Guelet alc'houe sklojou kêr Is. »

— « Va zad a zoug en e guerc'hen,
« An alc'houe aour deus eur chaden,
« A va zad brema zo kousket,
« A kaout an alc'houe n'allan ket. »

Mæs en d'he zreid a 'neum strinkas,
A d'he dornik flour a bokas,
Ac he chalmas dre e zellou
Carguet a dân ac a zaëlou.

IV

Heb goud ar pezh a dremene,
Neuse, eur pennad ac'hane,
En e balès, ar Roue kos
A voa kousket e creis an nos.

Kampr paour Gralon ne voa enni,
Netra nemet eur grucifi
Deuet a zorn eur mignon ker,
Sant Caourentin, escop Kemper.

Netra nemet eun Aviel,
Roët c'hoas gant eun den zantel,
Roët dean gant Guenole,
Evel eur merk a garante.

Kaër en e gosni, vel eun Ael,
E kouske Roue Breiz-Izel,
Ac, en dro d'e dall, e vleo guen,
A re, dispak, eur gurunen.

Neuze, Ahès, ar Brincès fall,
Evel pa vije skoët dall,
Sioul, en e gampr, dre urz Doue,
A deu da-laères an alc'houe.

En eur vale, var bek he zroad,
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,
A goustadik, deus e guerc'hen,
E ten, e c'hoarzin, ar chaden.

V

Piou a deu duont gant ar ru,
Pignet var eun hinkane du,
Ac en d'an daou lamp var e guein ?
Ken a strink an tân deus ar vein ?

Hennes eo messenger Doue,
Digasset en Is dar Roue,
Hennes eo abostol ar Feiz,
Sant Guenole, karet e breiz.

Tostat a ra e c'haloupat,
En e zorn deo e vaz Abad,
Ac eur stôl aour var e zaë ven,
Ac eur c'hlec'h tan en drô d'e ben.

N'eur gavet en ôr ar palès
E pini e kousk tad Ahès,
Divar e varc'h an den santel
A c'hlav, en nos, a voës huel :

« Gralon, Gralon, sao heb dale,
« Sao evit heuilla Guenole,
« Sao evit tec'hel deus ar môr :
« Sklujou Kær Is a zo digor ! »

Ac ar Roue kos, trubuillet,
Er mes e vele zo saillet :
« Din-me, din-me, va marc'h primal...
« Siouas ! Peurgollet ar guer-ma !...

A gant glac'har, e ber amzer,
E kerz da heul e vignon ker,
A, var ho lerc'h, en eur hyudal,
E klevont ar môr e ruillal.

Neuze ar Brincès dirrollet,
He amourous ganti kollet,
Dre guær Is, a glei ac a zeo,
A rede, dispaket he bleo,

Mæs pa gleo daou lamp ar c'hezek
Araug ar môr e tiredek,
Dre al luc'hed, gant nec'hamamant,
E c'hanve he zad ac ar zant.

« Va zad, va zad, ma em c'harit,
« Var ho marc'h skan ma c'homerit : »
Ac, eb respont, an tad tener
A zav e verc'h var au tailler.

Kerkent a môr a vuanna.
A Guenole, en eur grenn.
A gri : « Gralon, tól an diaoul-ze,
« Divar tailler da hiukane !... »

Kouskoude c'hoas, leun a enkres,
An tad a zalc'h ar bec'heres :
Mæs ar sant a ra sin ar groas
A deu ac a sko gant e vaz.

Kerkent mestres an droug speret
A ruill en holliou fuloret,
Ac e cleo tost ar Roue koz
Eur c'hoarzin skiltr' e creis an noz.

Mæs, rentet skanvoc'h, heb dale
E saill prim da c'heul Guenole,
Ac e varc'h, gleb e beder dale,
A lamp deus ar môr en douar.

IV

Da zao-heol, ar Sant a Gralon
A bigne var lein Mene-Hôm,
Pini, e dreid ebars en trez,
A zao a uz Douarnenez

A c'hane, Roue Breiz-Izel
Var e lerc'h a dolas eur zel :
Mæs, el lec'h Is, gant he dek dor,
Ne velas mui nemet ar môr.

« Eur guær em boa deus a gaëra
« A cetu hi et da netra !... »
A e galon oll a fraillas,
A e zaoulagad a voëlas.

« D'an daoulin, eme Guenole,
« Gralon d'an daoulin ganen-me. »
A gralon, didan e c'hlac'har,
A goë dan daoulin d'an douar.

Ac eno, dispak e vleas guen,
Ac e dall pleguet er bouldren
E lavare c'hoas ar Roue :
« Ra vo gret bolonte Doue !... »

Pa zavas divar he zaoulin,
Dindan tân flam heol ar mintin
E velas, a dreuz e zaëlou,
E luya *Men-ru-ar-goulou*.

Var ar men-ze hon tadou kos
A skuille goad d'eun Doue fos,
Ac ar Roue, e ber amzer,
A lavaras d'e vignon ker :

- « Du-on, e memor a guær Is.
- « Me a raj sevel eun Iis
- « Ac, evit testeni d'an oll,
- « M'he galvo Iis Remengol (1)

- « Pa vo an doueou maro,
- « A koët meur a goat dero,
- « Eun den, deus ar pevar avel,
- « A teuiö d'y, pobl Breiz-Izel.

- « Rac var dolmen ru deüs ar Tentatès,
- « Me lakei da rén ar Verc'hes,
- « Ac, evit henori ar Groas,
- « E c'hordrenio eur pardon bras.

- « Eno, an oll dud alliget
- « A gavo d'ho foanniou remed,
- « A Silvidiguez d'ho ene,
- « Dre c'hraç Mari, guir vam Doue.

- « Neuse, mar be sonj a Gralon,
- « E vo lavaret a galon :
- « Bras ar burzudou a zo bet
- « Ebars en amzer dremenet !

Poden ar Roue Gralon.

Itron Varia Remengol,
Mirit ouziamp na zaiamp da goll ;
Pedit ive, ho mab Jesus,
Ma vezimp gantan evurus.

— Itron Varia Remengol,
C'hui eo Rouanez ar bed oll,
C'hui eo hor mam, hor Batronès,
A ni ho meulo da jamès.

(1) Remengol, da lavarot o *Remed-oll*. Ar Roue Gralon a chencas hañs payen, Rumengoulou, *Ilu-men-ar-goulou*, pe *Men-ru-ar-goulou*, en hano christen a *Remengol*, d'eus a behini ar batrones, a zo hanvet an *Itron-Varia Remed-oll* (Notre-Dame de tout remède). Abalamour da burzudou bras a ra bemdez, eno, ar Verc'hes, a haoue amzer ar Roue Gralon, betec hirio.